

DELIENN

SAINT-VINCENT

Ar gened 'zo 'vel un delienn
An delienn 'gouezh war an douar
Ar gened ivez a ziskar
Fulenn goant

Ur plac'h yaouank ur gwir goantenn
Ur c'horf dispar un dremm dibar
A-greiz-holl rivinet pep tra

Ar gened a ya da goll
Ar gened a skarz

Pa vez kozh e kouezh
Ar plac'h gozh a gouezh
Diouzh ar brank

Ar gened 'zo 'vel un delienn
An delienn 'gouezh war an douar
Ar gened ivez a ziskar
Ar gened a ya da goll

Pa vez kozh e kouezh
Ur plac'h gozh a gouezh
Pa vez re gozh e kouezh
Ar plac'h gozh a gouezh
Diouzh ar brank

Kened ur plac'h yaouank
A zo vel un delienn war ar brank
An delienn 'gouezh war an douar
Ar gened ivez a ziskar

*La beauté est comme une feuille sur sa branche
Certaines tombent, d'autres restent et s'accrochent*

IJIN AR VEZH

PILÉ MENU

Sell
Pell
Dor
Digor

Chom a ran er-maez
Digenvez
En dienez
Ar sell
A flemm an den
Ma-unan penn

C'hoant da zistreiñ er goudor

Ijin ar vezh

Dor

Ijin ar vezh

Aon 'rak ar maez
Digenvez
C'hoant tec'hout pell
Rak ar sell

Sell
Pell
Dor

Sell ar re all
Pezh klevet
Lak da zoñjal
Strafuihet
Komzoù un naer
Dre doull an nor
C'hoant da vont er goudor

Tec'hout pell 'vit gouzañv ar sell

...

*Imagine la honte, seul, dehors
S'enfuir loin pour ne pas avoir à supporter les regards*

SKUIZH

BOURRÉE

Erru on skuizh, redek dibaouez
Dav bezañ 'tav war evezh

Nebeut a amzer a chom ganin
Teñval ar bed tro-dro din

Skuizh

N'on ket evit emgann enep d'al loen
E selloù 'zebr ac'hanon
N'on ket evit redek, un toull dirazon
Heuliet gant ael an aon

Emgann
Ael
An aon

Mil ha kant devezh 'maon me o redek
Daou voger a bep kostez
Ken uhel 'pignont 'teu ket ar gouloù
Heuliet gant ael an aon

Emgann

...

...

Diwall a ran ouzh loen an aon
Heuliet on gant
N'on ket evit emgann enep dioutañ
Redek a ran

Mil ha kant devezh 'maon me o redek
Daou voger a bep kostez
Ken uhel 'pignont 'teu ket ar gouloù
Dall gant ar spont

Emgann an anaon gant ael an aon
N'on ket evit emgann gant ael an aon

*Je suis fatigué de courir
Sans relâche, traqué par l'ange de la peur
La bataille de l'au-delà*

ARME AN DIENEZ

KAS A-BARH

Taolit evezh ouzh ar varzhed 'veldomp
Dindan flouradenn ar sonenn a ganomp
Kuzhet a-us d'an notennoù
Skoachet e diabarzh ar c'homzoù
Trawalc'h 'vit ar re greñvañ da gaout aon

Laoskit ac'hanomp da dremen hep klemm
Difennet ouzhoc'h da chom war an hent
N'oc'h ket 'vit lakaat da baouez
Baleadenn arlu an enkreiz
Anvet omp soudarded an dienez

Kuzhet
Ha skoachet

*Prenez-garde à nous
Caché derrière les caresses musicales, il y a de quoi effrayer les plus valeureux
Laissez-nous passer
Vous ne pouvez pas arrêter la marche de l'armée de la solitude*

DAÑS AN ANAON

VALSE

Ul lizher 'm oa resevet
Gant gwad un den 'oa bet skrivet
'Vit ur gouel 'oan bet pedet
En ur maner n'anavezen ket
N'anavezen ket

Pa 'oan deuet 'barzh ar sal
Ar sonerezh na gleven ket
Pa 'oan krog da zañsal
'M eus komprenet 'oant holl marvet
'Oant holl marvet

*J'ai reçu une lettre écrite avec du sang
Une invitation à un bal dans un manoir que je ne connaissais pas
Quand j'entrai dans la salle, je n'entendis aucune musique
C'est en me mettant à danser que je compris qu'il étaient tous morts*

C'HWEZH AR MARV

PLINN

Daou c'hant mil den
Daou c'hant mil marcheg
O tostaat
Evit piv 'maint o tont
Den ebet na oar
Daoust hag ez eo 'vidon
'Maint holl o tostaat
Tro-dro din

Netra d'ober enep dezho
Daou vil den o tostaat
Blaz ha c'hwezh ar marv 'zo ganto

Ganto
Daou c'hant mil skeud kuzh

Daou c'hant mil den
Daou c'hant re daoulagad
O sellet pizh
Gant avi
Ouzh piv 'maint o sellet
Gant spi n'eo ket ouzhin

Daou c'hant re daoulagad o sellet ouzhin gant avi
Blaz ha c'hwezh ar marv 'zo ganto

Ganto
Daou c'hant mil skeud kuzh

Den ebet na c'hell enep outo
Daou c'hant mil den armet, war o c'hezeg
Daou c'hant mil den bemdez o tont
Dibaouez o kendalc'h an emgann
Dibennet e vin a-raok ar mintin
Den ebet na c'hell enep outo

*Deux cent mille soldats qui s'approchent, de tous côtés
Ils ont le goût et l'odeur de la mort*

HO TORN

PLINN

Paotred yaouank ma c'hoñtre preparit o moñchoù
Deus kornig ho chuletenn stagit o chadennoù

Lakit 'barzh ho kol ho montr nag e krec'h ho chuletenn
Digant da gazell lak ho torn war bordig da chupenn

Nemet 'rabat e vo kaout div renkenn bontonoù
Ha pe ne faot ket hervezh ken dimeus ho chuletannoù

Dirak da vestr
Na bremañ kentañ mat a ri
Ho kontell laki 'n ho kol
Ha diwall mat eus da gont

Ma 'po ket kontell ebet a-benn pa 'c'hiet d'ho koant
Dirak da vestrez te 'po mezh da c'houlenn d'o unan

Dirak da vestr
Na bremañ kentañ mat a ri

Bremañ kentañ mat a ri nag eo klask ur c'hamarad
Nag evit monet asambles d'ur pardon benekad

Kar da vestrez 'zo pell 'zo nag e c'hortoz ar pardon
Na pa welo ac'hanout tridal ray he c'halon

Pa goñsidero ac'hanout nag e vo joaius ha gae
Evel ar bleuñv 'barzh ar spern gwenn e komañsamant miz Mae